

## KIS-697 – Menegiñ ar gwrezverk

(AAB da GE – 02 10 00)

Lenñ a ran p. 373, KIS-692, e La-13 : “tremen [ar boestou mir] un nebeut eilennoù en ur forn da 240°C” (isl. ganin). Ha ne ve ket ur gallekadur ? Uheloc'h e lennan c'hoazh : “Unan a lakaer en ur forn e 37°C, an eil e 55°C” — n'eo ket un diskoulm ivez. Petra lavare kentelioù SADED ? Me a skrivfe : “ur forn dezhi 37°C, an eil 55°C...”, pezh nad eo ket gwall skañv, anzav a ran. Skrivañ a rez p. 387, KIS-693, La-13 : “eleze bezañ soliadet 100 %” ; neuze perak ket : “ur forn 37°C, an eil 55°C...” ?

(GE da AAB – 23 10 00)

Kudenn a welez en doareoù da venegiñ ar gwrezverk. Gwir eo ez int da savelañ, kuit a blakañ diouzh ar galleg, a ziaezañ ivez mar klot an droienn diskoulm gant an droienn c'hallek. Diwar skouer “*ur park 30 m hed, 20 m led*” e c'hallfed lavarout : “*Ur forn 240°C gwrezverk.*” Pa reer anv eus ur muzul hepken e c'haller tremen gant ur bomm krennet :

“*Ur gordenn 30 m.*” Koulskoude e ve diaes lavarout : “*Ur forn 240°C*” dre an abeg-mañ : hed ar gordenn zo un doaread digemm anezhi, digemmoc'h bepred eget gwrezverk ur forn. Dres, a-zivout ar gwrezverk e lavarer :

“*Er gwrezverkoù izel, er gwrezverkoù uhel*”, an araogenn *en* o verkañ ar bezañ *en* ur poent eus ur skeul argemmañ ; e se ez eo kevazas, a gredan, lavarout : “*En ur forn er gwrezverk a 240°C*” hag, o krennañ : “*En ur forn e 240°C.*” Heñvel dra, pa vezer o tommañ ar forn, e lavarer “*en he c'haser d'ur gwrezverk uhel, da 240°C da skouer*”, an araogenn *da* o verkañ ar mont *d'ur* poent eus ur skeul argemmañ ha kevazas eo lavarout : “*Ur forn tommet da 240°C*” hag, o krennañ : “*Lakaat udb. en ur forn da 240°C.*”